




Itron Varia Roskudon e Pontekroaz

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 70 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

EBREL 1954

KLEVIT 'TA !! ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1954 ?

Eun tammig bolontez vat, mar plij, ha pep hini en em gavo eürus : c'houi da veza paet ho tle, ha ni da c'hellout mont war-raok. — Koumanant ordinal 500 lur — a enor : 500 l. — madoberour : 1.000 l. — V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist. C. C. P. 544.22 Nantes.

TAOLENN

Hor pedenn diouz ar mintin, gant L. B.	1
Yezou ar bed, gant V. S.	2
Karantez ar Vro, gant Y.-V. Perrot	3
Breiz o kana meuleudi da Vari	4
Al labour-douar, gant an Ao. de Guebriant	6
Gwezenn Vae, gant Gait Koadou	7
Koroll ar balan alaouret, gant Evnig-Penn-ar-G'hoad	8
Al laouarn hag ar rejin, gant S. S.	9
An tenn, gant Lan Elorn	10
Evnig Arvor, gant Laouenanig Breiz	13
Buhez ar Bleun-Brug	14
Keleier	15
Ar Bleun-Brug gwelet gant Kembreiz, gant P. Even	16
Eur o'hanfard-all	17

CONCORDI LOETITIA

Unanet el levenez,
— Argasit tristedigez —
Gant an Iliz, da Vari,
Kasomp holl hon meuleudi
Gwerc'hez Vari !

Jezuz a zo dasorc'het
Kalon Mari 'deus tridet
Ha bleuniet 'vel f'ourdriliz
Gant eur c'helou ken iskiz
Gwerc'hez Vari !

An Ele 'lein an Neñvou
A gan d'Ezi kantikou
Unanomp ganto hon mouez
Da veuli Hon Rouanez
Gwerc'hez Vari !

Rouanez ar Gwerc'hezad,
Hon selaouit, ni ho ped,
Grit m'ac'h advevimp, d'hon zro
Goude pred kriz ar Maro
Gwerc'hez Vari !

Drinded santel, leun a c'hloar,
Hag Unanded hep he far
Dre Vari, d'ho pugale,
Roit peurbadus buhe
Gwerc'hez Vari !

Mabig Efflamm

(Person S. Erwan-Minihy).

133682

Evit gwellaat hor buhez : hor pedenn diouz ar mintin

Ha c'houi zo kristen ? Ya, dre c'hras Doue, a respontoc'h, dioc'h-tu. Mat, neuze ec'h anavezoc'h ive komzou an Aviel : « **ret eo pedi, heb ehan... Hep-doun-me, eme Jezuz ; ne c'hellit netra !** »

Emaomp e kreiz an hañv.

Araok ma vez peurc'hraet ganeomp hor pennad kousk, bannou ske-dus an heol a zo dija en hor prenecher hag a seblant lavarout d'eomp :

« **Savet, savet Bretoned**

Setu ar mintin o toned

Ar parkou, an trevajoù, ho kalv d'al labour. »

Ma ne daolomp evez, war zigarez gounit amzer, e lezimp hor pedenn a-goztez.

Ha c'hoant hor beus ober labour vat, ober dervezioù frouezus ?

Chomomp eur pennadig gant an Aotrou Doue, araok staga, evit rei d'Ezañ hor c'halon ha kinnig d'Ezañ hon dervez :

« **Konsakri a ran va dervez**

d'ho kloar ha d'am silvidigez... »

D'an neb a c'houlenn, Doue a ro sklerijenn ha kalon. Hag eus an daou dra-se, hor beus ezomm, dreist-holl, evit gouzout gwelloc'h penaos en em gemeret gant hol labour ha miret da fallgaloni dindan pouez an dervez.

E son ar falc'her e kavomp ar c'homzou-mañ :

« **E bater neuze a lavar**

Ne vez ket hir, an holl a oar... »

Talvoudusoc'h eo eur bedenn verr, graet, e gwirionez hag a galon, eget eur bedenn hir, distaget n'eus forz penaos.

Gouezomp krenna hor pedennou, pa vez ret, met morse n'o dilezomp.

Da galz ac'hanomp, Jezuz a c'hellfe lavaret ar pez a lennomp en Aviel : « **Martha, Martha, tregas a gemerit gant kalz traoù. Eun dra hepken koulskoude a zo ret... »**

An dra ret, ha n'eo ket lakaat Doue a-du ganeomp, e kement hon eus da ober ?

Mammou, gouzout a rit pegement e plij da Zoue pedennou ar vugale ! Beilhit evit ma vo ho pugaligoù, aketus, bep mintin, da ober o fedennou. Tenna raint war ho labour, war ho tiegez, bennoziou puilh an neñv.

Hag e pelec'h kutuilh eun ali c'houekoc'h d'ho lakaat da bedi, diouz ar mintin, eget war muzelloù ar Breizad kalonek Y.-B. Kalloc'h ?

« **Pa goumañs an deiz sevel**

Na brasa levenez en em deurel

War an daoulin.

Dirag an deiz o tont adarre

Nag eur blijadur zispar è

Pedi e douster ar beure

War an daoulin.



L. B.

YEZOU AR BED

Lennet evidoc'h war « Le Courrier de l'Unesco ».

Hervez ar gelaouenn-mañ, bez ez eus hirio er bed wardro 3.000 yez pe langaj.

Setu amañ ar yezou ar muia komzet :

Ar chinaeg, gant 450 milion a dud, meur a rann-yezh anezo. — Ar Saozneg, gant 250 milion. — An Hindi-Urdu, gant 160 milion. — Ar Ruseg, gant 140 milion. — Ar Spagnoleg, gant 110 milion. — An Alamaneg, gant 100 milion. — Ar Japaneg, gant 80 milion. — Ar Galleg, gant 75 milion. — Ar Malaeg, gant 60 milion. — Ar Bengaleg, gant 60 milion. — Ar Portugaleg, gant 55 milion. — An Italianeg, gant 55 milion, hag an Arabeg, gant 50 milion.

Goude embann ar roll-se, ar gelaouenn a skriv kement-mañ :

« Il n'est pas du tout certain, bien entendu, que cet ordre sera le même d'ici une cinquantaine d'années, ni même que dans un avenir assez proche, les langues occidentales figureront toujours en aussi bonne place.

« En tout état de cause, les gens dont la langue maternelle est d'un usage très répandu devraient s'en féliciter sans toutefois s'en montrer trop fiers ; ils doivent par-dessus tout se garder d'attribuer le fait que leur langue connaît une large diffusion, à ses qualités intrinsèques.

« Chaque idiome, qu'il soit « primitif » ou « civilisé » exprime de façon appropriée la culture dont il émane, et celle du ou des peuples qui l'emploient. Chacun d'eux constituent l'instrument le plus commode et le plus sûr — et peut-être même le seul — dont on puisse se servir pour apprendre à connaître et à bien comprendre les cultures et les populations étrangères. »

Ar memes kelaouenn a zesk d'eomp eo stankaet kalz ar yezou broadel (langues nationales) abaoe ar brezel 14 hag ar brezel diweza. En Europa hepken int bet kresket eus an hanter, pe dost. Eur bern yezou koz, evel an iwerzoneg, ar sloveneg, ar tchékeg, al lituaneg... a zo bet digoret d'ezo doriou ar skoliou. An hevelep spered a weler oc'h en em sila hirio dre ar bed a-bez.

Pa c'houlennomp eta, eur plas frank a-walc'h er skol evit ar brezoneg, ha n'eo ket ober an neuz eo, ne reomp nemet mont da heul ar bed. Ar re a zo diwarlerc'h amañ, eo ar re a fell d'ezo enebi ouzomp.

O komz eus ar gudenn-se « Le Courrier de l'Unesco » a lavar c'hoaz kement-mañ :

« Cette tendance (multiplication des langues nationales) n'est nullement condamnable en elle-même ; une langue distincte est un attribut normal, encore que non indispensable, de la souveraineté nationale, et il est de toute évidence stupide et vain, de reprocher aux Irlandais de faire revivre leur ancien langage, ou aux Indonésiens de préférer le bahasa à une langue européenne très usuelle. »

A-zivout ar yezou bihan, « Le Courrier de l'Unesco » a skriv ouspenn :

... « Depuis la deuxième guerre mondiale, une place plus importante est faite aux idiomes des groupes minoritaires. Le cas de l'Irlandais a déjà été mentionné. De même, ceux qui désirent parler le frison, le breton ou le basque et faire apprendre ces langues à leurs enfants, ne sont plus — en général — considérés aujourd'hui comme des agitateurs antinationaux.

« Les gouvernements s'attachent à assurer à ces groupes un traitement équitable au sein de la collectivité et leur font des concessions jugées raisonnables sur le plan linguistique.

« La Suisse elle-même, qui avait déjà à faire face aux complications résultant de l'existence de trois langues nationales, a jugé bon, il y a quelques années, d'en adopter une quatrième, le romanche, à titre auxiliaire... »

Pa c'hell eur vro vihan evel ar « Suisse » deski peder yez en he skoliou, ne welan ket perak ne c'hellfe ket ar Breizad bihan deski diou.

Ouspenn, an amzer da zont a zo gant studi ar yezou. Kalz eo esoc'h d'ar Breizad a oar brezoneg ha galleg, deski eun trede yez.

Labouromp eta, dorn ouz dorn ; hag eus hon holl c'halloud, da rei d'ar brezoneg eur plas dereat en holl skoliou Breiz-Izel.

V. S.



KARANTEZ AR VRO

Kerkent ha ma tigor hon daoulagad da sklerijenn ar bed-mañ, e welomp, a bep tu d'eomp, traou hag a garomp : an traou-se eo ar Vro.

Ar Vro eo an ti-se omp bet ganet ennañ, an tad, ar vamm, ar gerent, ar vignoned hon eus kavet en-dro d'hor c'havel.

Ar Vro eo al lec'hioù dudi-se o deus gwelet c'hoarioù hor bugaleaj.

Ar Vro eo ive ar yez-se hon eus desket war barlenn hor mamm.

Ar Vro eo an iliz a blij d'eomp mont da bedi ha da zaoulina enni, ar vered a zalc'h en he deuar santel relegou ar re a gariomp ; an douarou edok glebiet gant c'houezenn ar re goz.

Ar Vro eo ar madou, a bep seurt, a deu d'eomp, madou korf, madou spered, madou ene, madou diniver dastumet, a nebeudou, ha tamm ha tamm, ha deuet d'eomp a rumm da rumm : ar Vro eo an dra-se.

Karomp hor bro Breiz Izel a zo bet aozet ken kaer evidomp gant Doue hag hor sent koz.

(An Ao. PERROT, en e Vuhez ar Sent.)



Breiz o kana meuleudi da Vari

Ilizou ha Chapeliou savet en enor d'ar Verc'hez Vari e Eskopti Kemper ha Leon.

Kanton Kemper.

I. V. Loe-Maria, Kemper (Iliz parrez).
I. V. Ti-Mamm Doue, Kerfeunteun.
I. V. Menez Karmez, Kerfeunteun.
I. V. Kerdevot, Erge-Vras.
I. V. Ar C'hras, Plugüen.

Kanton Brieç.

I. V. Killienenn, Landrevarzeg.
I. V. Landivizen, Ederne.
I. V. Niver, Ederne.
I. V. Ilizour, Brieç.
I. V. Populo, Landudal (I. P.).
I. V. Lannien, Ederne.

Kanton Konkerne.

Kalon dinam Mari, Konkerne (I. P.).
I. V. Loretta, Lanrieg.
I. V. Kerven, Tregune.

Kanton Douarnenez.

I. V. Kerineg, Poullan.
I. V. Loretta, Plogonneg.
I. V. an Holl C'hrasou, Ar Yeuc'h (I. P.).

Kanton Elliant.

I. V. C'helou Mat, Rosporden (I. P.).
I. V. Lokmaria 'n Hent, Sant-Yvi.
I. V. Gerniliz, Kore.

Kanton Fouenant.

An Itron Varia, Benodet (I. P.).
I. V. an Izel-Vor, Forest-Fouenant (I. P.).
I. V. an Dreneg, Clohars-Fouenant.
I. V. Kergader, Fouenant.

Kanton Plogastel-Sant-Jermen.

I. V. Penhors, Pouldreuzig.
I. V. Gullguiffin, Pouldreuzig.
I. V. Lanvern, Ploneour-Lanvern.
I. V. Tronoan, Sant-Yann-Trolimon.
I. V. Langivos, Ploneour-Lanvern.

Kanton Pontekroaz.

I. V. Roscudon, Pontekroaz (I. P.).
I. V. Konfers, Melars (I. P.).
I. V. Ar Veaj Vat, Plogo.
I. V. Sklerded, Beuzec-Cap-Sizun.
I. V. Lámgroaz, Kleden-Cap-Sizun.
I. V. Lannoureg, Goulian.
I. V. ar re gollet er mor, Plogo.

Kanton Pont' n'abad.

I. V. Garmez, Pont' n'abad (I. P.).
I. V. ar Mor, Leskonil (I. P.).
I. V. ar C'hoummou, Lechiagat (I. P.).
I. V. ar Joa, Kerity-Penmarc'h.

I. V. Sklerded, Kombrit.
I. V. ar C'hroaziou, Loktudy.
I. V. Treminou, Pleur (Plomeur).

Kanton Brest.

I. V. an Tiegez, Bouguen (I. P.).
I. V. an Elez, Porz ar Gemwerz.
I. V. Garmez (diskaret gant ar brezel).

Kanton Rekourans.

I. V. Kerbonn, Kerbonn (I. P.).

Kanton Lambazelleg.

I. V. ar C'helou Mat, Kerinou (I. P.).
I. V. ar Porz Mat, Sant-Mark.
I. V. Lokillo, Bohars.

Kanton Daoulas.

An Itron Varia, Daoulas (I. P.).
I. V. ar C'helou Mat, Hospital-Kamfrout.
I. V. Loretta, Irvillac.
I. V. ar Feunteuniou, Daoulas.

Kanton Landerne.

I. V. Reun, Guipavas.
An Itron Varia, Relek-Kerhuon (I. P.).
I. V. ar Joa, Penkran (I. P.).
An Itron Varia, An Dre (I. P.).

Kanton Lanniliz.

An Itron Varia, Lilla (I. P.).
An Itron Varia, Grouaneg (I. P.).
I. V. Brendaouez, Guisseny.
I. V. an Traon, Plougerne.
I. V. Troubiron, Lanniliz.
I. V. Penfeunteun, Landeda.

Kanton Lesneven.

I. V. Follgoad, Ar Follgoad (I. P.).
I. V. ar C'hroazou, Kerlouan.
I. V. ar Glanvourien, Plouider.
I. V. Sklerded, Kernouez.

Kanton Plabenneg.

I. V. al Lann, Lokmaria-Plabenneg.
I. V. Leskelen, Plabenneg ha Kersent.
I. V. ar Seiz Glac'har, Kosmeal (I. P.).
An Itron Varia, Guipronvel (I. P.).
An Itron Varia, Vourc'h-Wenn (I. P.).

Kanton Gwitalmeze.

I. V. Gwitalmeze, Gwitalmeze.
I. V. Kersent, Landunvez.
I. V. Shapular, Porsall (I. P.).
An Itron Varia, Brelez (I. P.).
Itron Varia ar C'hoummou, Porspoder.

Kanton Lokournan.

I. V. al Levenez, Lokournan.
I. V. Trezien, Trezien (I. P.).
I. V. an Traon, Trebabu.
An Itron Varia, Lokmaria-Plouzane (I. P.).
I. V. Bodonou, Plouzane.
I. V. ar Grasou, Konk.
An Itron Varia, Kastellin.

Kanton Kastellin.

I. V. Killidoare, Kast.
I. V. Kerluan, Kastellin.
I. V. Mene-Hom, Ploudiern.
I. V. Kergoad, Kemeneven.
I. V. Sklerded, Kerlaz.
I. V. Kelou Mat, okronan.

Kanton Karaëz.

An Itron Varia, Kleden-Poher (I. P.).
I. V. Kran Uhel, Spezet.
I. V. ar Vur, Kleden-Poher.

Kanton Kastelnevez-ar-Faou.

I. V. ar Porzou, Kastelnevez-ar-Faou.
An Itron Varia, Kollereg (I. P.).
I. V. Gerniliz, Tregourez.
I. V. Lourd, Leuhan.
I. V. Pontouarn, Tregourez.
An Itron Varia, Landelo.
An Itron Varia, Landevenneg (I. P.).

Kanton Kraon.

I. V. Rokamadour, Kameled.
I. V. ar Follgoad, Landevenneg.

Kanton Huelgoad.

I. V. ar C'helou Mat, Lokmaria-Berrien.
I. V. an Nenvou, Huelgoad.
(I. P.).
I. V. Koadkeo, Skrignak.

Kanton Pleyben.

I. V. Gwennili, Pleyben.
I. V. Lanneleg, Pleyben.
I. V. Gars-Maria, Pleyben.
I. V. ar Feunteuniou, Gouezeg.
I. V. Treguron, Gouezeg.
I. V. Koad ar Roc'h, Lannedern.
An Itron Varia, Brenniliz (I. P.).

Kanton Montroulez.

An Itron Varia, Plourin (I. P.).
An Itron Varia, Plouyann (I. P.).
I. V. ar Salet, Sant-Martin.
I. V. ar Vur, Montroulez.

Kanton Lanmeur.

I. V. Kernitron, Lanmeur.
I. V. ar Seiz Glac'har, Garlan (I. P.).
I. V. ar Joa, Guimaeg.
I. V. Loretta, Plougasnou.

Kanton Plouigno.

I. V. Sklerded, Plouigno.
I. V. Zivilly, Plouigno.

Kanton Sant-Thegonneg.

An Itron Varia, Sant-Thegonneg (I. P.).
An Itron Varia, Ar C'hloastr (I. P.).
I. V. ar Releg, Plouneour-Menez.

Kanton Sizun.

(Iliz na chapel ebet.)

Kanton Taolè.

An Itron Varia, Penze (I. P.).
I. V. Kallot (Enezenn), Karanteg.

Kanton Kastel-Paol.

I. V. Kreisker, Kastel.
I. V. Sklerded, Kastel.
I. V. Kroaz-Baz, Rosko (I. P.).
I. V. ar C'helou Mat, Rosko.
I. V. Druetz, Enez Vaz.
I. V. Prat-Koulm, Plougoulm.
I. V. Kerellou, Plouenan.

Kanton Landivisiau.

An Itron Varia, Lambaol-Guimiliau (I. P.).
An Itron Varia, Bodiliz (I. P.).
I. V. Lourd, Landivisiau.

Kanton Ploueskad.

I. V. Kerriou, Ploueskad.
I. V. Ker-Yann, Ploueskad.
I. V. Garmez, Gwinevez-Lokrist.

Kanton Gwitevede.

I. V. Berven, Gwitevede.
I. V. Lambader, Plouvorn.
I. V. an Esperans, Kleder.

Kanton Kemperle.

An I. V. savet d'an nenv, Kemperle (I. P.).
An Itron Varia, Clohars (I. P.).
I. V. Sklerded, Kerrien.

Kanton Arzano.

I. V. Loretta, Redene (I. P.).
I. V. Sklerded, Guilligomarc'h.
I. V. ar Follgoad, Lokunole.

Kanton Bannaleg.

I. V. ar Follgoad, Bannaleg (I. P.).
I. V. an Erc'h, Bannaleg.
I. V. ar C'helou Mat, Melgven.

Kanton Rieg.

I. V. Trebeleg, Rieg.
I. V. Tremor, Rieg.
I. V. Tremalo, Nizon.
I. V. Kerfornet, Nizon.
I. V. Lanriot, Molan.
I. V. Tremorvez, Nevez.

Kanton Skaer.

I. V. Penvern, Skaer.
I. V. Plaskaer, Skaer.

GLOAR DA VARI
HA MEULEUDI.

AL LABOUR-DOUAR E BREIZ

abaoue hanter-kant vloaz

gant an Ao. de Guebriant

Atañchou bihan hag atañchou bras.

War vihanaat ez a e Breiz niver an atañchou. Er bloaz 1892 ez oa e Breiz 388.418 atant pe ferm. E 1942 ne gaver mui nemet 251.650. Er eur ober 50 vloaz eo aet eta war a-dreñv a 35 dre gant niver ar fermou, daoust m'eo bet kresket an douar labour.

Diwar goust an atañchou bihan eo deuet ar c'holl-se, rak e 1892 ez oa e Breiz 126.728 atant, bihanoc'h eget daou zevez-arat. E 1942 n'eus mui anezo nemet 15.436 — : 87 dre gant nebeutoc'h.

Atañchou eus a zaou betek dek devez-arat :

112.998 e 1892, ha 71.294 e 1942 : 37 dre gant nebeutoc'h.

Atañchou eus a zek da 20 devez-arat :

79.095 e 1892, ha 62.276 e 1942 : 21 dre gant nebeutoc'h.

Atañchou a ouspenn 20 devez-arat :

78.124 e 1892, ha 102.650 e 1942 : 31 dre gant muioc'h.

Evel a weler, an atañchou bihan a vez debret gant ar re vras. Perak ha penaos.

Gwechall, eun atant vihan pe eur penn-ti a c'helle en em denna, en eur vont an dud anezañ diouz an deiz, bep an amzer, d'an atant vras tosta. Herio eo kollet ar c'hiz-se hag an atañchou bihan lezet hep sikour gant ar re vras, n'hellont mui harpa setu ma vezont dilezet ha staget a nebeudou ouz ar re vrasoc'h. Evel just ar mekanikou nevez stankoc'h stanka a zo ivez penn-abeg d'ar stad-se, mekanikou hag a c'houlenn ma ve atao kresket an douarou ma labouront enno.

Ar re a zo perc'henn d'o douar.

Kredi a rafed e ve kresket e Breiz niver ar re a zo perc'henn d'o douar : ar c'hontrol eo. Lennit kentoc'h.

Etre 1929 ha 1950 eo aet war-adreñv niver ar perc'henned : 7 dre gant er C'hôtes-du-Nord, 9 dre gant er Finister, 4 dre gant en Ille-et-Vilaine, ha 10 dre gant er Morbihan, hervez an niveradur graet gant ar c'houarnamant e 1929.

E-keit-se eo bet kresket evelhen ar re a labour diouz feurm : 4,5 dre gant er C'h.-du-Nord, 9 dre gant er Finister, 3 dre gant en Ille-et-Vilaine ha 9 dre gant er Morbihan.

Meur a abeg a zo da gement-se. Houmañ a zo unan anezo : Perc'henned da atanchou bihan o deus bet ranket lakaat o douar e gwerz dre ma n'hellent mui en em denna. Alies eo bet prenet an douar-se gant tud ha n'int ket labourerien douar, c'hoant d'ezo plasi o arc'hant ha kaout interest diwarno, en eur feurmi an douar prenet.

Suroc'h ivez eun atant da chom en he fez pa ne vez ket perc'henn d'ez i an hini he labour. Ahendall e vez alies lodennet etre ar vugale pe lakaet e gwerz, da varo an tad.

Kant bro, kant giz.

E Bro-Leon emañ ar c'hiz, pa varv an tad, perc'heunn d'e atant, da lodenna houmañ a lodennou ingal, etre ar vugale. Evel-se ez a awechou da netra, atañchou deuet da veza kaer war bouez eur vuhez-pad a labour tenn.

E Kerne, ar re goz a ro an dilez eus o douar da unan eus o bugale dibabet ganto. Da hemañ da zigoll, en arc'hant, an eritourien all e-keit ha m'ac'h en

em denn ar re goz da veva en o fart o unan. Ar c'hiz-mañ, ma torr ar familh a zalc'h an atant en he fez.

Doujusoc'h eo giz-Leon ouz ar re goz pegwir e chomont betek o maro gant an hini a dle kemer o lec'h, nemet lakaat a ra an atant e riskl da veza freuzet.

Pep giz he deus he zu mat hag he zu fall, ha diskouez a ra ivez eun tam-mig perak ez a war ziskar niver an dud a zo mistri d'an douar a labouront.



EUR C'HIZ KOZ

GWEZENN VAE

Eur c'hiz eo houmañ hag a gaver beo c'hoaz e parrez Lokronan-Kerne. Abaoue mil bell 'zo emañ eno ar c'hiz-se.

Ar re a dremen e Lokronan etre ar sul genta a viz Mae ha gouel Sant Yann, a chom souezet o welet eno e-kreiz ar blasenn eur pezh gwezenn ha n'edo ket araok.

Hag e c'houlennont eveljust, penaos ha perak emañ eno ar wezenn-se ha ne seblant ket kaout gwrizioù.

Respontetet vez d'ezo kement-mañ :

Gwezenn Vae, a vez plantet bep bloaz war blasenn Lokronan, en noz etre ar sadorn hag ar sul genta a viz Mae.

Ar baotred yaouank o deus ugent vloaz er bloaz, eo a rank ober al labour-se.

Kenta reont, er sizun araok eo mont da zibab ar wezenn war ar maez, ha d'he frena digant ar perc'henn.

Kerkent hag ar gwener e vez graet eun toull war ar blasenn da reseo troad ar wezenn.

Met ar wezenn, n'eus forz pegen bras e ve, ne vo laketa en he flas nemet, en noz, d'ar sadorn, ha ne dle beza gwelet gant den nemet d'ar sul vintin. Didrouz ha buan e tle beza graet al labour gant ar baotred yaouank hepken.

E-pad an noz, ar baotred yaouank-mañ, a lamo digant ar wezenn eun toulladig mat eus he skourrou glas. Pep hini neuze, a yelo da lakaat eur bod anezo ouz prenestr e vuia karet, hep lavaret netra da houmañ, eveljust.

D'ar sul vintin, araok ma tarzo ar goulou deiz, kenta preder pep plac'h yaouank a vo ober eur sell ouz he frenestr. Mar deus outañ eur skourr glas, eur merk eo he deus eur c'haredig. Kerkent e tle lemel kuit ar bod, rak arabat eo e ve gwelet gant den ebet.

Darn all eus ar bodou a vo laketa da gaeraat ar puñs.

An holl vodou a chomo ouz ar c'hef a vo laketa d'ober tantad Sant Yann, d'ar 24 a viz Mezeven. Ar c'hef e-unan a vo gwerzet, diouz an noz, d'an hini a ginnigo ar priz uhela. Mar deo eur wezenn fao, peurvuia e vez prenet gant eur boutaouer koad.

Gaid Koadou.

Koroll ar balan alaouret

MM. ♩ = 84 . pas trop vite ...

(1^{er} groupe de Filles). En dro d'ar prad ha d'an draonienn, di - rei di ra tra

la de ri tra En dro d'ar prad ha d'an draonienn, hon eus ka-vel. ba-

lan melen (2^e groupe) Du-hont d'an nec'h lein ar me-nex, E - leiz hon eus ka-

vet i-vez ba-lan a-laouret, ba-lan a-laou-ret (Ensemble) Holl assam-blez dan somp ha kanomp seder dindan heol an nevez am-zer !

Tra la la la la la la la la la la ! Tra la la la la la la la la la la ! ... (Attention au fa# de la 3^e ligne) ..

1. Endro d'ar prad 'barz an draoñienn
Direi, dira, tra la laritra !
Endro d'ar prad 'barz an draoñienn,
Hon eus kavet balan melen.
Du-hont d'an nec'h, lein ar menez,
E-leiz hon eus kavet ivez,
Balan alaouret, Balan alaouret.

Diskan :

Holl asamblez, dansomp ha kanomp seder
Dindan heol an nevez amzer !
Tralala, lala, lalala — tralala, la, la,
Tralala, lala, lalala — tralala, la, la.

2. Gant balan melen kurunet, Direi...
Gant balan melen kurunet
Nn 'zo evel rouanezed.

Hor pinvidigez, hor madou
Eo yaouankiz ha bokedou,
Balan alaouret, balan alaouret.

3. Ha setu savet eur palez, Direi...
Ha setu savet eur palez !
Deuit eta va rouanez,
Hag unanomp hor c'halonou
'Vel m'eo unanet hor bodou.
Balan alaouret, Balan alaouret !
4. Balan melen, paotrezed koant, Direi...
Balan melen, paotrezed koant,
Bleuniou tener, kalonou drant ;
Keit ha ma 'z ay ar bed endro,
E Breiz-zel e tiwano
Balan alaouret, Balan alaouret.

Eynig-Penn-ar-C'hoad.

Eur son gaer da veza dañset gant
merc'hed bihan.

C'HOARZOMP

Al louarn hag ar rejin

« Alan vlevak » pôtr ar c'hig yar,
Gwechall filouter hep e bar,
Skornet bremañ e izili
Da baka yer pe glujiri,
Ha rannet gantañ e leve,
'Ranke frita bara kerse.
Lemm e livenn evel an drein,
Krinet ar c'hroc'henn war e gein,
E rede da glask peadra
D'en em vaga,
Pa welas, dres a-uz d'e benn,
Dre douez deliou eur winienn,
Blokajou rejin malaga
Ker koant... dare... keit ha beza !
« Set 'eno 'vat hag a deuzfe
Dindan da staon... ma tistagfe !
Siouas ! pôtr paour, re verr da c'har,
Penaoz e c'hellfez o diskar ? »
— « Oh ! eme Lan, traou ken divlaz !
Mont da goll dent gant rejin glaz ?
Eur « marc'h laou » bennak a zeuio,
A gavo kaer staga ganto ! »

C'houi, petra 'gavit ar Pôtr Lan ?
Me 'ra eur c'hanfard anezañ !

S. S.

AN TENN

Unan eus deizioù kenta miz Gouere 1943.

Goulou-deiz. Ne ruzie ket c'hoaz an oabl gant an heol o sevel a-rez torgen-nou Lambaol, pa glevet storlok ar c'hirri o loc'ha war porzioù ar c'hériaden-nou. Bale an dud hag ar c'hezeg, gwigour ar rodeier, stirlink ar c'hlaivioù (1) paket gant mall ha taolet er c'harr, kan skiltrus ar c'hilheien o tibouka eus o lochenn, harzadennoù ar chas war lez an hent, a roge sioulder habask ar beure brumennek. Anat e oa tiz war an dud ha war bep tra.

Ha dija, amañ hag abont, er parkeier melchen, an heol, o tispaka lentik a-dreuz ar vorenn, a lintre war ar c'hlaivioù krog en o labour. Sarac'h ar filc'hier o sanko hag o ruza er c'hilasvez druz, pe o skintina ouz ar mein-lemma, en em veske gant richan ha geiz al laboused o kana o eürusted er girzier. Ar c'hezeg a strevie hag a gristilhe eus an eil park d'egile... Hag adarre e klevet gwigour ar c'hirri war an hentou, hag o storlok, damvouget dindan ar bec'h, ha mouez kreñv ar baotred o kana war o c'hargad.

Edo mare ar foennadeg. Sin vat a oa gant an amzer, eun avel yac'h a c'houeze diwar an uhel. Heol ha sec'hor a vefe da beurdroc'ha, da drei ha da rodella ar foenn.

Evet gantañ e gafe, Lom Goulm a oa da genta o vont er-maez eus e di. Eur marc'h-houarn a oa o tont war an hent. Lom a chomas a-sav da welout piou a oa o tremen, hag e kemeras e vutun da rolla eur sigaretenn. Herri, mab Yann Benneg e oa. Micherour en eur c'hivijerez e Landi, Herri en doa gou-lennet eun devez ehan da zont da sikour e dad war-dro ar foenneier.

— Brao 'vo an amzer, Lom ?

— Me'gred. Ezomm a zo. Hag a nevez gant ar brezel ?

— Marteze hoc'h eus klevet. An aotrou Rannou, an noter, a zo bet paket dec'h gant an Alamanted. Dilamet eo bet, gant forz taolioù, dirak daoulagad e wreg hag e vugale. Kredi a rer en doa darempredou gant an Eneberez (2). Hag an holl a lavar e vo fuzuilhet pe kaset d'an Alamagn, ha ne deuo biken en-dro ac'halehont. An deiz all e oa eur paotr yaouank, nevez deut er-maez eus ar skolañ, paket ganto e Lesneven. Me 'lavar deoc'h, emamp fresk gant ar re-se.

Bep taol e koueze ar gaoz war ar memes tra, pa gomzed ouz unan o tont eus kêr, rak ganto e teue eur c'helou bennak : ar brezel, ar soudarded c'hlas, oc'h ober reuz dre ar vro, o skigna ar spont, o waska hag o suna ar bobl.

— Ma, a droc'has Lom, dao eo deomp peania evelato. Na glemmomp ket re, pa vezomp lezet da labourat.

Lom Goulm a oa unan eus ar wazed galleudek ha kalonek-se, bras an niver anezo war ar maezioù, hag a soñj en o furnez e tle an den en em lavarout eürus, keit ha m'en deus yec'hed ha frankiz da labourat.

Tennet gantañ tal e garr gwintet, Lom en doa tapet eur vac'h da ziskarga e velchen. Tufa a reas en e zaouarn, ha starda e vizied war e grog.

A-greiz-holl e chomas a-sav, heg ec'h astennas e ziouskouarn. Trouz eur mekanig dre dan bennak o tont eus tu al Logellou. Eur marc'h-dre-dan a zifoupas e korn an hent, daou soudard a-c'haoliad warnañ. Kemer a reas hent ar porz, ha chom a reas a-sav e-harz ar c'harrad melchen. Unan eus an daou Alaman a ziskennas.

Lom n'en doa ket fiñvet. Squezet ha souazanet e oa. Ne anzavas ket outañ e-unan e oa eun tamm brao spontet zoken. Ar brezel 14 en doa graet, ha santout a reas ar vez gant ar gwad o redek dre e wazied.

An Alaman a oa diskennet eus e vejanig a oa eun ofiser yaouank, hervez

(1) Klavioù : les « outils ».

(2) An « Eneberez ». « la « Résistance ».

doare. Eur paotr hir ha mistr, melen e vleo ha gwer e zaoulagad. Flour souezus, evit eun den eus e ouenn, e feuas e vouez.

— Bonjour, monsieur.

Fraez hag aes awalc'h e komze ar galleg. Displega a reas e tlee soudarded ober tennadegoù e-kerz an devez-se end-eeun, eus krec'hioù Lambaol war-du lanneier Lokmear, ha pegen risklus e vefe d'an dud koulz ha d'al loened mont er-maez e-pad an amzer-se.

Seven ha dereat, mouse'hoarzus zoken (pez a sebezaz Lom), e lavaras kenavo. O c'haolia ar marc'h-tan, e stagas :

— Gouzout a ran hoc'h eus kalz a labour. Met ni, hon eus ar brezel da c'hounit.

Lom a dufas d'an douar ha, dilaouen-kaer, e kendalc'has da ziskarga e velchen.

Nebeut amzer goude, ar wazed a oa o tivizout e-kreiz ar gêriadenn. Nec'het bras ha doaniet e oant, hag en-eneb da bez a c'hoarvez peurliesia pa vez eun nebeut kourerien o kaozeal kenetrezo, ne save uhel mouez hini ebet anezo. Santout a raent war o diouiskoaz pouez ar gwaskerez. Sellout a raent tro ha tro ouz an douar, hag ouz an oabl seder a bromete dezo eun deveziad labour fonnus. Ar merc'hed, war dreuzou o dorioù, a c'hortoze, ken nec'het hag ar wazed.

Tri bloaz a oa, war-dro ar memes mare, soñj o doa, e oa ken brao all an amzer. Edont o tebri eun tamm bara hag oc'h eva eur banne, e-kreiz tre daou reuziad falc'hat, laotien gant o labour o vont war raok, pa zegasas eur plac'h ar c'helou dezo : e oa an Alamaned o tont buan ha buan, hag armeoù Bro-C'hall o tec'hout d'ar C'hreisteiz. Ar soudarded estren o doa tizet Roazon, ha Sant-Brieg hervez lod. D'ar mare e oant sur o tostaat da Vontroulez, ha da gredi e oa o dije treuzet kêr Landivizio a-benn an noz. Traou spouronus a veze kontet diwar o fenn, tud gouez ha didruez e oant, hag e lazent ar vugale hag ar merc'hed dre ma'z aent, hag e tibabent e-touez ar baotred da vont d'o heul. Ar falc'herien neuze a oa bet digalonekaet krenn. Perak kenderc'hel da labourat, peogwir e oa pep tra da veza gwastet, perak dastum eostou, peogwir e vefent laeret pe e vefe lakaet an tan warno ? Unan pe zaou a gin-nigas raktal distrei d'ar gêr. Koulskoude e savjont holl, hag e kendalc'hont holl da falc'hat betek an noz. An amzer a dremenas. Hag abaoe tri bloaz o doa kendalc'het da labourat, evel diagent, daoust d'an trubuilhou. Hag abaoe tri bloaz, an dienez hag an diouerou o kreski dre ar vro, e teue niverusoc'h niverusa tud ar c'hêrioù da glask eun tamm boued war ar maez. Mat o doa graet kenderc'hel da labourat.

En diwez, pep hini eus ar wazed bodet e-kreiz ar gêriadenn en doa divizet petra ober.

Ne yafe ket ar chatal er maez. Ne vefe ket falloc'h evit chom eun devez er c'hreier.

Met al labour a oa ret mat hen ober. Marteze ne badfe ket an amzer vat. Ha neuze, goudoret e vefent enep an tennou e kleuz ar ganienn.

Lan ar Fur a lavaras e yafe gant e zaou vab da echui falc'hat prad ar Saoz. Yann Benneg a yafe gant e vab Herri da drei ha da rodella prad ar vilin. Per Kemener a chome gantañ eun tammig foenn da droc'ha e prad ar stivell. Lom Goulm hag e vreur Leon a soñje e vefe mat prad ar froud da vernia a-benn an endervez.

Kreisteiz a zeuas ha ne oa bet klevet an distera tenn. Ar foenn a graze hag a strake, eun dudi, dindan an heol devus. Sederaet e oa gwazed ha maouezed. Hag an aon a oa en em silet er heure e kalon pep hini a oa tec'het kuit. Merennet e voe buan e pep tiegez, rak c'hoant a oa da gas al labour ar muia ma yefe gallet war raok a-benn an noz. Hag ouspenn, daoust ma n'en anzave den, heligenta e veze etre an tiegezioù da vare al labourioù bras.

War-dro div eur hanter e strakadennas an tenn kenta, hag an hekleo anezañ a zassonas penn da benn d'an draonienn. Hag e stlakas eun tenn all,

hag eun all. Hag e voe klevet chadennadoù tennou eur mindrailherez. Ha trouz pounneroc'h berr-ganolioù. Tennou skiltrus ha tennou boukoc'h. Boledou a dremene en eur sutañ a-zioc'h an draonienn. E-pad div eur pe war-dro e talc'has ar c'holori.

O klevout an tennou kenta, ar wazed a baouezas hag a savas o fenn. Fur e kavjont klask repu e gwask ar c'hleuzioù, ken gouzout penaos e trofe an abadenn. O welout e oa muioc'h a drouz eget a zroug, e tistrojont d'o filc'hier ha d'o frec'hier.

O tiskenn en-dro d'ar pradoier goude ar verenn-vihan, ha bouetet ganto al loened, edont, pa drouzas an taolioù diweza.

An avel a greske hag a droe en izel. Koumoul a save diouz ar gwalarn, ma c'hoarie an heol kuzeta en o adreñv. Hasta a reas ar wazed, hag ar merc'hed deut d'o skoazella, goude goro ar saout, da andella ha da vernia kement ha ma c'helljont. Distan e teue da veza, hag an heol a groge da ziskenn, o kreski skeud ar gwez hag ar brouskoad war al leton.

Ar freskder o sevel, gant c'hwez kreñv ar foenn troc'h hag al louzeier, a zivec'hie al labourerien diouz o skuizder, hag ar mouezioù a save tro-war-dro seul-vui ma tostae al labour d'ar fin.

Ar Fured o doa echu. O c'hivioù war o skoaz, treuzi a rejont ar richer, hag en em gavout e prad Lom Goulm.

— Bremañ emañ echu ganeoc'h ivez, eme Lan ar Fur da Lom. Eur reuziad mat hon eus gallet ober hizio, ha kraza o deus graet an traou.

— Ya, ha daoust da vrammou ar c'hwiled, eme Lom. Pet eur avat e c'hellfe beza ? N'emañ ket poent an Anjelus ?

N'en devoe ket ezomm a respont. Eur c'hloc'h a voe klevet o skei eun taol.

— Ha ! a droc'has trumm gwreg Lom, o c'hoarzin, p'edod o lavarout.

Ar c'hloc'h a sonas eun eil taol. Nebent goude, eun trede taol. Hag eun all. An taolioù a skoe goustadik, an eil warlerc'h egile, kreñvoc'h pe hanter vouget hervez froud an avel. Kloc'h ar barrez a oa o seni ar c'hilaz.

— Ar c'hilaz, eme eur vaouez.

— Evit piou e c'hellfe beza ? a lavaras eun all.

Hini anezo ne vefe bet evit lavarout da biou e oa o seni. Gouzout a raent e oa toc'hor bras Laou Gêr-Vihan, ha klañv awalc'h an toer. Met Laou Gêr-Vihan a oa koad dero oc'h ober anezañ, hag ar medisin en doa lavaret ne oa aon ebet da gaout rak na barefe an toer.

Pa zegouezjont e kêr, e klevas an dud ar c'helou. Katell Remeur, graet anezi c'hoaz Katell Penn ar c'hoad, a oa bet lazlet gant eun tenn. Ha konta a raed en eun doare pegen truezus e oa c'hoarvezet an taol. War-dro teir eur hanter e oa. Katell a oa o c'hwennat betarabez gant diou vaouez all, ouz torgennoù ar vourc'h. Pa glevjont an tennou, an teir maouez a voe spontet awalc'h. Met maouezed e oant na garent ket chom hep flañval. Ouspenn-se, poan o deveze o c'hounit o zammig bara. Kenderc'hel a rejont da c'hwennat, trabaset awalc'h evelato gant an dañjer a santent o nijal tro-dro dezo. Edo unan eus ar merc'hed o lavarout ne c'helle padout ken gant an aon, hag e vefe suroc'h mont da c'houdori e pleg ar c'hleuz, pa bakas Katell taol ar maro. Eur boled, bet tennet a-dreuz moarvat, a sankas en he fenn, a-dreñv he skouarn.

Strafuihet ha spouronet, an diou vaouez all a welas ne oa netra gwelloc'h d'ober eget mont buan d'ar vourc'h da gemenn ar c'helou mantrus ha da c'hervel ar medisin.

Ar maer a voe galvet, hag e voe pellgomzet (1) d'eur medisin. Kaset e voe ivez ar c'helou d'an Alamaned. war-lerc'h-se e voe gouezet o doa echuet ar re-mañ kentoc'h da denna, diwar-goust an droug o doa graet. Eun ambulans a zeuas, hag a reas eun dro c'houllo, rak ne oa netra d'ober.

Truezusa peza oa, Katell a oa chomet intañvez abaoe brezel 1914. Hag he mab a oa prizonier.

E soulder ar serr-noz o c'hilza, e klevet tud o vale war an hent, o vont etrezek Penn ar c'hoad, da bedi evit repoz ene Katell Remeur. **Lan Elorn.**

(1) Pellgom : téléphoner.

EVNIG ARVOR

Va c'halon baour zo glac'haret,

Kollet am eus

Eur mignon mat, eun evn karet,

O ! pebez keuz !

Tremen a ra, gwall alies, an ankou en hon touez, ha mont a ra gantañ hor mignoned an eil goude egile.

D'ar 7 a viz Meurzh diweza, en-dra ma tigore Santez Anna Wened he Doriou, da belerinajou ar bloaz 1954, eo nijet d'an Neñv, hor mignon mat ha skrivaniere breizat, *Evnig Arvor*.

Evnig Arvor oa ano pluenn an Ao. Caurel, relijius eus a urz ar Varianisted. Mignon bras e oa d'an aotrounez Vallee, Ernault ha M. Mordiern hag ezel eus Breuriez-Veur ar brezoneg.

Ganet e Plounevez-Kintin d'ar 27 a viz C'houevrer 1874, an Ao. Caurel, galvet gant Doue, a yeas da Frer hag a reas e leou kenta d'an 23 a viz Gwenegolo 1891.

Betek ar bloaz 1913 her c'havomp oc'h ober skol e Sant-Nicolas-ar-Pelem. Goude ar brezel 14 ez aio da Blankoet (1919-1921) ha da Sant-Tegoneg (1921-1937).

Eno edo, p'am eus graet gantañ anaoudegez wardro 1934. Ne ankounac'hain biken an digemer c'houek a rae d'in atao pa 'z aen d'e welout da Sant-Tegoneg : Eurvezioù plijus hon eus tremenet asambles o komz eus Breiz hag ar brezoneg. Diskouez a rae d'in e baperioù, e varzonegoù, e bezioù-c'hoari...

Eur maout e oa dreist-holl da zével pezioù-c'hoari brezonek. Sant Tegonegiz o deus soñj c'hoaz, a-dra-sur, eus meur a hini anezo laket gantañ war-sao, evito.

Holl oberennou brezonek hor mignon, a zo bremañ gant an ao. Breton eus Boulvriag, ha kinniget e vezint gantañ da levraoueg Landevenneg.

An ao. Caurel en deus labouret kalz war dachenn ar skol. Gout a ouie an tu da lakaat e vugale da garout o yez. Darn anezo zoken a zo deuet da veza skrivaniereien ampart.

Skrivet en deus alies e Feiz ha Breiz an ao. Perrot. En em gavet oun bet gantañ e Skrignag, meur a wech, rak kenlabourat a raemp a-gevret war dachenn Feiz ha Breiz ar Vugale.

Dinerzet gant ar skuizder, aet fall e zaoulagad, kouezet ar grenien war e zaouarn, e renkas an ao. Caurel, kuitaat e dachenn labour ha pellaat diouz Breiz, evit mont da ziskuiza da Antony, e-keñver Paris. Eur rann-galon e voe d'ezañ ar c'himiad-se.

Eul levenez vras e voe d'ezañ distrei d'e vro garet, da vaner Kerriou e Gouezeg, prenet gant e vreudeur. Ac'hano, Evnig Arvor a nijfe laouen d'ar bed all.

Doue avat a c'houlennno digantañ, kent mervel, eur binijenn gallet. Kuitaat Maner Kerriou ha distrei da Antony adarre, da fin an hañv e 1953.

Prestig a-walc'h goude, marteze gwasket gant kleñved ar vro, an ao. Caurel a guitae ar bed-mañ, evit eur vro welloc'h el lec'h n'ez eus na kleñved na dispartii.

Laouenanig Breiz.

BUHEZ AR BLEUN-BRUG

Tostaat a ra hor gouelioù : Pleuvihan, Lokournan ha Gwened. Mont a ra hor c'homite eus eur vodadenn d'eben.

Diou brezegenn genta abadenenn studi Gwened a zo roneoskrivet : « Nos préoccupations culturelles; face à nos responsabilités chrétiennes et apostoliques », gan an Ao. Le Bihan, ha « Psychologie des jeunes de 17 à 25 ans », gant an D^r Philippe. 25 pajenn a zo anezo. Kaset e vezint d'an nob o goulennno, evit 60 lur gant ar mizou kas. Evit-se, skriva d'ar gelaouenn.

D'an 28 a viz Meurz eo bet barnet ar skritellou. Ouspenn hanter-kant a oa anezo. Dibabet ez eus bet unan ha roet d'e oberour : Guegueniat-Kerinel eus skol an Arzou-Kaer e Kemper, eur priz a 25.000 lur.

Hor sekretour a gendalc'h da weladenni ar skolioù e Bro-Leon evit Bleun-Brug Lokournan. E pep skol e reer d'ezañ digemer mat. Pa erru, bodet e vez ar vugale en eur strollad, pe zaou pe dri, hervez o niver. Komzet e vez d'ezo neuze eus ar Bleun-Brug, eus ar brezoneg hag eus ar c'henstrivadegou-skol.

Goude e vez roet d'ezo da glevet kanaouennou ha displegadennou kenstrivadegou-skol ar Bleun-Brug evit 1954, enrollet war ar « magnetofon », prestet d'eomp gant an Ao. Yeun ar Gow eus Gouezeg.

Ar c'hanaouennou ha displegadennou war ar « magnetofon » a zo kanet pe lavaret gant Marivonig ar Gow eus Gouezeg, Per ar Foll ha Josef Vetel eus skolaj Sant-Loeiz Kastellin, Kaourintin Lannuzel eus skol Sant-Per e Brieç, Yolanda Pouchoux ha Noela ar Gouil eus skol Pouldergat.

Evit echui e vez laket ar vugale da gana, e brezoneg bewech ma c'hellont, ha roet d'ezo da glevet dioustu o mouez war ar « magnetofon ».

Ezomm ebet da lavaret pegement e plij seurt abadennoù d'ar vugale. E-doug eun eurvez-pad e selaguont gant ar vräsa evez eus ar re vihana betek ar re vrasa, e kër koulz ha war ar mēz, paotred ha mērc'hed.

Al levr « Le breton par l'image » a vez kinniget d'ar vugale a gan brezoneg en o fart o unan. Paet eo ar priz-se gant an F. C. B.

Siouaz ! Avat, amzer eo a vank d'eomp da dremen dre an holl skolioù.

Da sul ar C'hazimodo e pedomp ar C'helc'hiou Keltiek ha badagou sonerien d'en em voda e Karnag, Morbihan, evit gellout en em welet ha tremen a-gevret eun devez laouen. Eun oferenn a vo lavaret eyito gant eur brezegennig. Goude, eur gaozeadenn war Kadoudal. Merennet e vo a-gevret, ha warlerc'h, abadennoù laouen betek an dispartl.

Sekretour ar B. B. en deus bet graet eur gaozeadenn diwarbenn ar brezoneg e Ti-Kër Kastellin, d'ar 25 a viz Meurz dirak eun hanter-kant den bennak. En deiz warlerc'h an O. F. a embanne kement-mañ :

Jeucl soir, le Cercle Celtique de Châteaulin organisait une conférence sur la langue bretonne, et avait choisi à cet effet, M. Vincent Seité, secrétaire général du Bleun-Brug, directeur d'un cours de breton par correspondance, dont la compétence en la matière éclata en la circonstance.

Au cours de la causerie, M. Seité parla de l'histoire de la langue bretonne, de sa physiologie, de ses subtilités, de ses caractéristiques, de ses possibilités, et donna une énumération des mieux conques des rapprochements philosophiques, linguistiques et un tableau des étymologies du breton... Il agrémenta son exposé par des auditions d'enregistrement sur magnétophone, de chants et monologues recueillis lors des récents concours du Bleun-Brug.

De bonnes histoires de nos concitoyens, MM. Jean Manis et Thos, furent enregistrées et livrées aussitôt à l'audition de l'assistance enthousiaste. Un chœur du Cercle Celtique Châteaulinois clôtura cette charmante soirée qui contribua à sauver du même coup l'esprit, les traditions, la poésie et les croyances de notre belle province.

MM. le colonel Le Guillou, président du Syndicat d'Initiatives ; Pierre Moulin, président du Cercle Celtique ; les professeurs du Collège Saint-Louis, etc... rehaussaient de leur présence cette intéressante soirée.

KELIENIER

Enklask ar « C'hourrier » hag ar « Progrès ».

Sacha a reomp evez hon lennerien war al labour dreist a ra ar « C'hourrier » hag ar « Progrès », en e bajenn greiz, bep sizun.

Trugarekaat a reomp ar journal-mañ, hag an ao. Duigou dreist-holl, evit ar sklerijenn a daolont evel-se war ar vuhez vreizek.

Goulenn a rae an Ao. Duigou, en e brezegenn e Gwened, m'en defe ar Bleun-Brug, eur gelaouenn ivez e galleg, da sila e vennoziou, e-mesk ar re ne lennont ket brezoneg. Met ar gelaouenn c'halleg a c'hellfemp sevel, daoust ha n'emañ ket aze er bajennad-se eus ar « C'hourrier » hag ar « Progrès » ?

Souezus eo, neketa, responchou an enklask graet war ar vuhez vreizek, embanet war nivereun ar 4 a viz Ebrel. Responchou ar J.A.C. ne glotont tamm ebet gant ar re all ! Daoust ha n'eo ket kement-se eur merk emañ an emzao-mañ oc'h en em zistaga, dre vras, diouz ar bobl ; merk eul levezon o tont eus an diavēz marteze ivez. Gant plou emañ ar wirionez ?

Gouel an Ykam e Kemper d'an 9 a viz Mae.

Eur gouel bras e vo hemañ. Yaouankizou kristen ar méziou a drido en deiz-se, hag a ziskouezo o nerz. An otrou Chaloni Fave, aluzener meur ar Bleun-Brug, ha bet unan eus gwella diazeourien an Y.K.A.M., en eskopti, eo a rajō ar brezegenn d'an oferenn-bred.

Goude lein e vo da welet eur c'hoariadeg veur a zisplego d'eomp buhez ar Finister hirio.

Leun a vuhez.

Leun a vuhez eo Breiz-Izel. En deizioù tremenet e lavare ar journalioù, edo ar Finister er penn araok er Frañs evit ar sevel tiez nevez. Ha war pegement a draou, emañ er penn araok, n'eo ket hepken ar Finister, met Breiz-Izel ! Kredi 'ran, zoken, emañ an traou evel-se abaoe pell 'zo. Dec'h e sellen war « La Croix du dimanche » kartenn ar chepeliou d'ar Were'hez e Breiz ; an darn vuia anezo a zo e Breiz-Izel. Pa sellan ouz kartenn leor bras Debidour, war « La sculpture bretonne » e welan ivez emañ an darn vrasa eus ar savadurioù kaer : Ilizou, chapelioù, kalvarioù, boizioù, karnelloù... e Breiz-Izel. Eur merk anat a vuhez hag a binvidigez eo a zo aze. Ar spered breizek hag a zo muioe'h digemmesk e Breiz-Izel, a c'hellfe beza evit eun dra bennak. Neuze 'ta dalc'homp d'ezañ.

Rouanezed.

Morse n'he deus bet hor bro kement a rouanezed eget abaoe m'eo ganet ar « republik ». Pep toull, prestig, en devo e rouanez ! Biskoaz kement-all ! Ar skouer a deu eus a uhel. Gwelit nag a drouz he deus graet « La Bretagne à Paris » gant he rouanez ; eun dra ken diwirion koulskoude, mat hepken da drelli spered ar paour-kēz plac'hed yaouank. Avel ha netra ken ! Gwelloc'h labour a vefe da ober gant hon nerz hag hon ijin.

Penn-ar-bed.

Eur c'holl amzer, alies, eo mont da welet kalz eus ar filmou a dremen en hor parrezioù, hag a-wechou zoken gwella ma 'z int eo da louza hon eneou.

Bep an amzer, koulskoude, e tremen eur film bennak hag a dalvez ar boan mont-d'e welout.

War ar roll-mañ e c'hellomp lakaat « Penn-ar-Bed », bet savet gant Roger Moride, eur Breizad.

Diskouez a ra ar film-mañ ar pezh en deus a gaer, ar Finister. E bardonioù, a-dra-sur, gant Troveni vras Lokorn er penn kenta, met ivez, gizioù santel hor Breiz-Izel,

evel ar bedenn ha « buhez ar Zent » diouz an noz goude koan, en eur familh a Vro-Leon.

Ennañ e sked ivez hor savadurioù kaera : hor c'halvarioù, ilizoù ha chapelloù.

Ma tiskouez d'eomp ar film-se hon dañsou kaer hag onest, gwelet a reer ennañ dreist pep tra eur bobl o labourat da c'hounit he bara pemdezlek : labourerien ar mor ha labourerien an douar, e-keit ha ma splann dirazomp kaerder dispar an natur, azalek ar Menez betek an Arvor.

**Kaer an Arvor, kaer ar Menez,
Kaer eo hor Breiz hor c'harantez...**

Kenstrivadegou skol.

Emañ « Ar Falz » o nevez rei da anaout anioù ar vugale o deus gounezet eun dra bennak er kenstrivadeg skol e brezoneg graet evit skolioù ar c'houarnamant. Ouspenn 700 paotr ha merc'h o deus kemeret perz er kenstrivadeg-se. Ar prizioù a paet gant an F. C. B.

Ar film Bleun-Brug,

graet gant « Brittia films » a gendalc'h da ober tro-Breiz ha zoken troioù kerioù Bro-C'hall elec'h ma z eus Bretoned divroet. Goude beza bet diskouezet e Roazon, en Naoned, e St Brieg, eo bet digemeret ar film-se a ya da yeul « Mister ar Folgoat » gant kalz a blijadur evel re ar Mans ha Caen. Ar re holl a wel « Bleun-Brug » dreist holl ar Vretoned divroet, a drid gant levez, rak eun daolenn eus ar Vro a dremen dirak o daoulagad, ha meur a hini a lavar : — « Red eo d'eomp mont d'ar Bleun-Brug er bloaz mañ. »

Eur film war Sant Erwan : ...ha war Ker Ys.

« Brittia films » a zo oc'h aoza daou film nevez : unan war **St Erwan**. Ar c'hoarier J.-P. Kerien, ginidig a Vro-Dreger ha brezoneger, eo a raio St Erwan : « Dre garantez evit Breiz hag evit sant Erwan eo e roan va skoazell », en deus hen lavaret da H. Caouissin.

A berz eur c'hoarier a vicher, kement-se a zo brao.

Gwerz Ker Ys, a heulio ar film nevez-se. Jarl Priel a vo ar Roue Gradlon. Ar c'hoarierien all : Dahut, Ar Prins Ruz, St Gwenole, n'int ket c'hoaz dibabet.

An daou film breizek-se a vo sturlet gant Herry Caouissin.

Ar Bleun-Brug gwelet gant kembreiz

Notenn.

Nebeutoc'h eget eur bloaz 'zo, e kasas an Ao. R. Gordon-Williams, Penygroes, eul lizer d'ar wask o lavarout e oa e-sell da vont da Vreiz da geñver an hañv, hag e vije laouen da gemer penn eur strollad e-pad ar veaj, mar kavjed awalc'h a dud yaouank c'hoant ganto respont d'e c'halv.

Kavet mat ar menoz, e krogas ar veaj da zeiz diwezañ miz Gouere.

Lezomp bremañ unan anezo da gontañ dimp penaos e voe kont ha ra vo trugarekaet c'houek an Ao. Tom Herbert evit e zeizadur plijus. — Renner « Yr Aelwyd ».

31 Gouere.

Eunnek Kembredd birvidik, pe gentoc'h, dek, evit lavarout ar wirionez, rak « cho-met oa eur paour kaez koz warlerc'h » pa 'n em gavjomp war borz an hent-houarn e Southampton, hon daoulagad troet ganimp war-du Breiz. Redadeg ouez goude-se da vont da gemer eun tamm pred e kêr kent sevel war ar vag. Dre ma oa Bobi Gordon o vleniañ ar strollad hag-heñ o tiwall war pep tra, e c'halle bezañ sioul spered pep hini gant unan eveltañ, hag-heñ ledan awalc'h e ziouskoaz da zougen ar bec'h. Ha pa oa ar vag war nes mont kuit, sed an « eunnekvet » o tegouezout... « d'an eunnekvet eur » !

1 Eost.

Diskenn e St Malo, ha kouezañ tal-ouz-tal gant spontailh ar yez. Dre se, setu darn eus ar merc'hed ha mont dezi dre hanterouriez eur geriadur, evit klask ren ac'hanomp dre gevrinoù ar galleg, tra n'eomp en trefi o veaji dre vro Vreiz. Ret oa kemmañ trefi e Roazon, hogen chom a rejomp pell awalc'h eno evit gallout arnodi hon diouiziegezh war ar yez.

Dere'hel da vont e-pad eurvezioù mat goude-se kent degouezout e Kemper. Rouan o c'hortoz ac'hanomp eno ha dare da goll pep siziañs e teujomp. Ha ni war-raok adarre davit penn hor beaj da Gastellin lec'h ma kavjomp an Itron de Bellaing oc'h ober degemer dimp.

Daoust ma oamp skuiz, se ne viras ket ouz lod ac'hanomp da chom war vale betek m'hon dije gallet gwelout darn eus lidoù ar Bleun-Brug hag a zo eur gouel broadel evit Breiz. Pell e vimp araok ankounac'haat ar ganiri hag ar c'hoariadeg war ar c'hlaezenn sklerijennet gant an tredan, hag an dud a villadoù en o c'hoazez tro-war-dro en amc'houlou.

Pelloc'h, tro hanter-noz, e voe enaouet goulaouennoù gant an engroez, hag e krogas an ambrougadeg da loc'hañ, war-du kêr, ar pilledou sklerijennet oc'h ober evel eur sarpan tanflammet o troidellañ en deñvalijenn. Hañvalout a rae dimp bezañ en eur vro hud ha marzus, dreist-holl divar glevout an ton fromus a gane an engroez en eur vont gant an hent.

Lidet e voe an oferenn ouz eun aoter sklerijennet o neuñ war c'horre an dour. War ar pont-kreiz-kêr edomp-ni, en hor sav, o vami dirak an holl draoù ha ni skoet gant kaerder ar gouleier e-barz an dour. Tremen eun eur goude hanter-noz e oa pa voe fin d'an oferenn.

2 Eost.

Devez sul. An dihun e-kreiz trouz an darbaradeg e-mesk ar Vretoned deut d'ar gouel, darn anezo o kousket en hevelep lec'h ha ni e-ser eur bagad archerien bet o tremen an noz eno ivez : ha ni, didrabas-kaer e-keit-se, na petra 'ta ! Neuze, Per Even, gant e gembraeg heson o klask divorvitellañ pevar faotr kembreat kousket-maro, dre ma oa dare an oferenn da gregi !

Renner Kembreiz o kenderc'hel da gousket, evit kelou-se ! Eur pennad warlerc'h ha ni war draoù betek kêr da gavout ar merc'hed. Goude lein, mont da heul an engroez d'an oferenn lidet war ar maez. Hag eur wech echu eno, ambrougadeg lies-liou gant paotred ha merc'hed Breiz en o gwiskamantou broadel. Kêr leun-barr. An holl o vont hag o tont ha kirri o siliennañ !

D'an enderv e renemp hor c'hammedou davit brasañ diduamant ar Gouel dalc'het war eun dachenn ec'hon, hag heol miz Eost en e gaerañ. Koroll oa eno ouz son ar binawou, hag an dilhad kaer eun dudi dreist pep tra.

Ambrougadeg, c'hoaz eur wech, evit distrei e kêr, ha boem an engroez kemmesket gant musik ar binawou. Hag erfin an disparti : pep hini o vont gant e hent, kêr o vont war sioulañ ha pep tra o steuziañ gant serrnoz.

N'eo ket arc'hoaz avat, e tisonjomp ar gouel, na kennebeut an degemer graet gant Breiziz d'o gweladennerien a Gembre.

**Troet diwar Tom Herbert
gant Per Even.**

Eur c'hanfard all !

— Ho tri, eme ar Barner, e vezoc'h staget ouz ar groug nemet e roan aotre d'eoc'h da zibab ar wezenn.

— Me, a lavaras Yann Zaoz, a c'houlenn beza staget ouz eur wezenn buplri, an uhela a gavoc'h.

— Eun dervenn, d'in-me, eme ar Skosad.

— Ha me ouz bod-spezard, mar plij, eme Padraig a Iverzoun.

— Ar wezenn spezard a zo re vihan !...

— Oh, aotrou Barner, amzer a gemerjin da c'hortoz ma kresko !...

(Kannadig Landi.)

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697






PHOTO JOS LE DOARÉ

KLEVIT MAT

D'an 30 a viz Mae

BLEUN-BRUG BRO-DREGER

e Pleuvihan

Bleun-Brug ar mor en enor da Sant Vaodez.

Eus 8 h. da 10 h. 30 : Kenstrivadegou ar Bleun-Brug.

da 11 h. : Oferenn-bred.

da 14 h. : dirak ar mor : Koroll ha Kan.

C'hoariva : Ar mor hent ar Zent.

Prosesion vras Sant Vaodez.

da 21 h. : Nozvez vreizek.

Eur mor a gan e vo Pleuvihan d'an 30 a viz Mae evit Bleun-Brug Bro-Dreger.
Tregeriz a-bez a vo en deiz-se e Pleuvihan.

Da Lun ar Pantekost, 7 a viz Mezeven

BLEUN-BRUG BRO-LEON

e Lokournan

Bleun-Brug a c'han

en enor da Sant Herve, patron ar Varzed.

Eus 8 h. da 10 h. 30 : Kenstrivadegou ar Bleun-Brug.

da 11 h. : Oferenn-bred.

da 14 h. : Koroll a Kan.

Sant Herve, patron ar Varzed (jeu scénique).

Prosesion Sant Herve.

Bennoz ar Sakramant.

21 h. : C'hoariva brezonek.

Eur mor a gan e vo Lokournan da lun ar Pantekost, deiz Bleun-Brug-Leon.
Leoniz a-bez a vo en deiz-se e Lokournan.